

- 201 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

79. FRANSEZA KOZIK

(follennoù 240 - 242)

- Debonjour dec'h, va mammik Illiad,
Aze e maoc'h o kanna ho tillad ?

- E kanna va dillat ken guen ag an erc'h.
Petra e ar balle a rit-tu, va merc'h ?

- Me zo deud d'ho pedi, va mam a va zad
Da vonnet evidon d'ar Folgoat.

Diloar a divotez pennachou mad,
Var ben ho daoulin noaz mar gal ho galon pad.

- Va merc'h petra an torfet o c'heus gred,
Pa o c'heus meritet beza lazet?

- Me ne meus gret torfet e bed,
Ne med ar c'houernerez e deus gred.

Ar c'houernerez deus an ti
Ag ar vab ena koulz ag hi.

Pa voan em goele e krena n'derchen
En n'eus digasset eur vugel d'am c'hichen.

Hag hi mond d'an erc'h^o en eur kana ^o komp. :
Setu bed bugale Franseza. nec'h

Ar justiç zo avertisset
Franseza Kozik int kroget
Dar maro he kondaonnet.

Da veza krouget a losq^{et}
He ludu gant an avel goëntet.

○○○

Ar barner d'ar boureo a lavare :
- Mil aon e meus ken a krenan
Na ve eur varn re gallet oman.

- Seiz goëch on bed var he diousk oa
Na ne med ouarzin ouin ne ra.

Nemet houarzin ouzin ne ra pepred
Lavaret din mond an eizvet.

- Lavar dime, Franseza Kozik,
Evid petra ne varvez ked ?

- Eur goulmik ven zo a zioc'h ma fen
A vir na rikle ar gorden.

Jesus a Vari zo em c'herc'hen
A vir na rikle ar gorden.

An Itron Varia ar Folgoat
A pedan bemdez mintin mad
A zoug skabel dindan va zaoudroad.

- Gwisket eun ivis roussinet dezi,
Loskit an tan en dro dizi
Neuze deuot a ben anezi.

° ° °

- Oll dud an ti zo bed deus va goëllet
Med ar c'houernerez ne de ked,

Ne med ar c'houernerez deus an ti
Hag ar mab hena koulz ag hi.

° ° °

Ar c'houernerez deus an ti
Ractal ma e deuet dirazi

Eun eluen tan zo sinklet outi
Hag a puluc'has anezi.

Eun elluen tan an distera
Pulluc'has an nezi ractal.

° ° °

He meronez kent ma klevas
Da kaout ar justiç promt e hias.

- 203 -

- Lakit va fillorez er valanç
He me roïo deoc'h e pouez a chevanç

A ma neket avoalc'h kement se
Me roïo deoc'h pouez va inkane
Va dib ha me var he goure.

—————
VVVVVVVV

Louisa Herviou, kemenerez en Taole,
6 févr. 1851

—————
VVVVVVVVVVVVVV